

Patoenn

3 Film-bevaat / Frañs / 45 mn

Advouezhiañ : Dizale

Kinniget evit ar c'helc'hiadoù 1 ha 2

Strobineller ar voestad ravioli - 7mn35 / 2005 gant Claude Barras

Kenproduiñ : Folimage / Cinémagination (Bro Suis) / helium Films (Bro Suis)

Savet diwar oberenn Albertine ha Germano Zullo

Priz ar gwellañ film-bevaat - Devezh Soleure - Bro Suis 2006

Priz Courts de Récré - Court 18 - Paris - 2006



Bep noz e oar Armand, micherour war chadenn en ul luzin toazennoù, digeriñ ur voestad ravioli da goan. Met hennozh e lamp ur pikol mell tamm strobineller 'maez ar voest. Kinnig a ra da Armand lakaat daou deus e hetoù da vezañ gwir.

Dindan toenn ar stered- 8mn30 / 2005 - gant Sylvain Vincendeau

Kenproduiñ : Folimage / Cinémagination (Bro Suis)

Priz Ciné Cour Les Nuits magiques - Bègles 2005

Dre e brenestr emañ ur paotr yaouank o sellout ouzh ar stered. Dibosupl eo. Gouloù a zo betek re e kêr. Ken dipited 'vel eo ken e ya kuit deus kêr. Gant e garr-tan e ya betek ur menez bihan a seblant bezañ brav-kaer. Staliañ a ra e deltenn eno. Laouen bras eo...



Patoenn ha liorzh al legumaj - 28 mn / 2000

gant **Benoît Chieux - Damien Louche Pelissier**

Senario : Damien Louche-Pélissier- Benoît Chieux - Cami Di Francesco

Kenproduiñ : Folimage / France 3 / TPS Jeunesse / Teletoon - SWR WDR



Ankoueet 'zo bet pevar penn-legumaj en ul liorzh. Patoenn, an 'ni fri furch, a ya war glask al liorzhour, met kollet e hent gantañ etretan. Adkavet e vo e vignoned gantañ ha dizoloet ur ti-gwer kurius 'walc'h, ur penn legumaj euzhus o chom ennañ... Met e pelec'h eo aet al liorzhour d'en em goll ? Ha piv eo hennezh en gwirionez ?

Diougan ar raned

Film-bevaat / Frañs / 2003 / 1e30 - Kinniget evit ar c'helc'hiad 3

Seveniñ : Jacques-Rémy Girerd

Senario : Jacques-Rémy Girerd, Antoine Lanciaux, Iouri Tcherenkov

Produiñ : Folimage

Advouezhiañ : Dizale

Prizioù : Gouel Berlin (2004), Postdam (2004), Ottawa (2004), Chicago (2004), Porto (2004), Bangkok (2005).

Fiteven ha Juliet a zo o chom 'barzh un ti-feurm gant Tom, o mab advabet. Degemeret o deus merc'h ar re Abalen, amezeien dezho, aet da veajiñ.

Dour beuz a zo vont da gouezhañ en-dro war an douar. Dre chañs ez eo ar raned barrek war an amzer... O welet pegen drastus e c'hellfe bezañ an darvoudoù evit ar boudoù bev, e tiviz ar raned troc'hañ o gouestl kozh : ne chomint ket mut ken da geñver an dud.



Kelaouiñ a reont ar vugale deus an dañjer o tont.

Dont a ra Ferdinand da vezañ un Noe a vremañ neuze. War ar prim e klask saveteiñ e familh, loened ar zoo, re an ti-feurm hag e donenoù pato. Flodañ a ra an ti-feurm war ar mor gouez a drugarez d'ur vouzelenn-rod c'hwezet mat tro-dro dezhañ. Tud ha loened a vez hejet-dihejet e kerzh troioù kaer dic'hortoz... Ha dont a rafent a-benn da zefial an elfenoù dichadennet betek re ?

40 devezh dindan ar glav dizehan, hep debrñ, a zo gwall hir ha diaes eo d'al loened en em glevout, dreist-holl abaoe m'eo degouezhet Baot hag a vez o lakaat reuz. En desped d'ar strivoù graet gant Ferdinand ha Juliette evit sioulaat anezho, emañ un emsavadeg war-nes tarzhañ war vourzh...



Ur fablenn strafuilhus eo Diougan ar Raned, o reiñ ur sell nevez war istor kozh... Noe !